




Chapel Sant-Mikael ha peniti Dom Mikael, e Plougerne

Photo Jos LE DOARÉ, Châteaulin

Bleun-Brug

MIKAEL AN NOBLETZ

BLEUN-BRUG KERNE

PONT-E-KROAZ, 18 A VIZ MAE

En enor d'an Itron-Varia

Dindan renadur an Ao. FAUVEL, Eskob Kemper ha Leon.

Azalek 8 eur 30 : **Kenstrivadegou :**

Lenn, displega, kana (bugale skol) ;
Prezegerez, kana, konta (evit ar re vras).

— 11 eur : **Oferenn-Bred,**

kanet gant an Ao. Chaloni ar Gall, person ar Pont ;
Prezegenn gant an Ao. Chaloni Batany, person
Sant-Vaze Kemper.

Kan gant Lazou-Kana ar Pont, ar Skolaj Sant-
Vaze Kemper, Skaer, Gourlizon, Treboul, Landu-
deg, Beuzeg, Lotudi.

— 14 eur 30 : Abadenn vras, war ar blasenn :

Kenta lodenn : **Koroll ha kan,** gant al lazou-kana
sonerien Kemper, Kastellin ha Douarnenez ; Kel-
c'hiou-Keltiek, Nevez Kastellin, Lokorn, Douarne-
nez, Pouldregat ha Pouldreuzig.

Eil lodenn : **Taolennou beo misteriou ar Rozera**
(jeu marial).

Prosesion vras Gwerzhed Kerne.
Bennoz ar Sakramant.

Ha prenet hoc'h eus al levr nevez : « Aviel sant Mazhe » gant an Tad
Medard ha Maodez Glanndour'. Priz : 250 lur ; frejou kas 30 lur. Her goulenn
digant an Ao. Floc'h, aumônier, Pens. Saint-Pierre, Saint-Brieuc, C. C. P.
Rennes 342.12.

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed
start a reomp eta da bae o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret
d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, Treboul (Finistère).
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé
de Saint-Renan (Finistère).

133663



En souvenir de Dom Michel LE NOBLETZ

Plouguerneau et Le Conquet : le berceau et la tombe de Dom Michel
Le Nobletz !

Dans ces deux paroisses, des cérémonies commémoreront le tricen-
tenaire de sa mort et rappelleront à tout le diocèse de Quimper et de
Léon l'action apostolique qu'exerça, en Basse-Bretagne, dans la première
moitié du XVII^e siècle, ce grand Missionnaire.

Quelle figure originale et attachante avec son relief et ses contrastes !
Ce fils de Plouguerneau, Breton par toutes les fibres de son âme, s'est
formé à Bordeaux, à Agen et à Paris. Né dans un château, il fut l'ami
des pauvres. Nourri de la tradition, il fut l'initiateur hardi de méthodes
nouvelles, déconcertantes pour ceux qui, rivés au passé, ne se souciaient
ni de s'adapter au présent ni de préparer l'avenir. Solitaire, il transmit
le flambeau au Bienheureux Père Maunoir, qui devait trouver chez nous
tant de collaborateurs pour poursuivre l'œuvre entreprise. Léonard par
ses origines, il garda toujours pour les marins de Douarnenez une prédi-
cation spéciale. Austère jusqu'à l'héroïsme dans ses mortifications,
véhément dans sa prédication comme un Prophète de l'Ancien Testament,
il demeura plein de mansuétude pour ses adversaires, de compassion
pour les malheureux, et de délicatesse pour ses intimes.

Que de contrastes et d'harmonies en cette riche personnalité de
missionnaire et d'ermite dont la grâce divine transforma la fougue en
ferveur dans l'oraison et en zèle dans l'apostolat.

Je souhaite que le Bleun-Brug contribue à faire mieux connaître celui
dont l'Eglise a déjà proclamé les vertus et qu'un jour, nous l'espérons,
elle élèvera sur les autels.

† ANDRÉ,

Evêque de Quimper et de Léon.

Dimanche des Rameaux 1952.

GWERZ war Buhez Dom Mikael

Me am eus choazet eur Vestrez,
Eun Itron hag eur Rouanez :
Va c'halon a zo ravisset
O soñjal piz en he gened.

C'hui eo, o Itron Varia !
D'eoc'h en em erbedan muia ;
Pedit ho kwir vab a druez,
D'ober em c'heñver trugarez.

Allas ! me 'm eus e ofanset
Hag e Vajeste 'm eus douget
Alies da facha ouzin,
Pedit Jezuz d'am fardoni.

Bep mintin souden pa savan,
Dirag va Doue e ruzian,
Va Doue, va Zalver benniget,
Pardonit d'in va yaouankted.

Kellies ma c'houlaoz an de,
M'ho trugareka va Doue,
Da veza ganeoc'h plijet
Lemmel va c'halon eus ar bed.

Aotrou Doue, distroit ouzin
Roit d'in ar pez a fell d'in
Ha roit d'in ar c'hras da zisprij ar
[bed]

Hag ar c'hras d'ho karet parfet.

Evit klevet va drouk prezeg,
Ne doun ket en em c'hlaç'haret,
O soñjal e Salver ar bed
Ouz hor prena kement poaniet.

Evit me beza paour gwisket,
Ha gant kalz a dud disprijet,
Me 'm eus esperañs hag a gred
E plijin da Zalver ar bed.

Emäoun leun a baourentez
Ha karget a binvindigez,
A binvindigeziou spered :
Ouz nep o c'hask n'o nac'her ket.

Va yec'hed am eus ofanset,
O troug intent disprij ar bed
An dra-ze n'am eus ket keuziet,
Rak va Jezuz am eus kavet.

Etouez an holl dud ar bed-mañ,
Ne c'houlennan nemet unan,
Ne c'houlennan nemet Jezuz
Gant sikour e Vamm druezus.

Kalz a dud a zo estonet
E defaot n'hellont lavaret,
E defaot n'hellont kompreni
Pebez buhez eo va hini.


Ar vuhez am eus-me choazet
A zo katekiza ar bed,
Ar vuhez eus an Ebestel
Mignoned ar Roue eternal.

Lusifer a zo kounnaret,
Ouz va gwelet bale ar bed
Evit miret ouz an eneou
Da vont d'an tan gand an diaoulou.

Ha te, pec'her kriz aheurtet,
Sao 'ta eus bouilhenn ar pec'hed ;
Sao timad 'maez eus ar vouilhenn ;
Ha chench da vuhez ker monden.

Pec'her dibreder, soñj bremañ
Peger berr eo gloar ar bed-mañ ;
Gloar an douar ne deo netra
Nemet tremen ebioù ne ra.

Dom Mikaël an Nobletz.



BUHEZ SANTEL MIKAEL AN NOBLETZ

I. — E VUGALEAJ

MIKAEAL an Nobletz, an hini a dlle beza gloar Breiz-Izel, skouer ar veleien
ha sklerijenn an holl gristenien, a deuas er bed, d'an 29 a viz Gwengolo
1577, e maner Kerodern, e parrez Plougerne.

Hervé an Nobletz, aotrou Kerodern, oa ano e dad, Franseza Lezvern, ano
e vamm ; unnek krouadur o devoa, pemp paotr ha c'houec'h merc'h. Mikael oa
ar pevare eus ar vandenn. A-vihanik, e roas da anaout ne vije ket e-giz ar re all.

N'oa c'hoaz nemet pevar bloaz hag e tiskoueze dija beza troet kenañ da
bedi. Bez ez oa, demdost d'ar maner, eur chapel da Zant Glaoda. Di e karie
mont, meur a wech bemdez, da zaoulina ha pa veze klasket gouzout outañ e
pelec'h e veze bet, e lavare, ken braoik ha tra : « Me a zo bet e ti Doue ».

Met evit mont d'ar chapel e oa ret treuzi cur chaoser ; en aon e c'hoarvezfe
droug gant he c'hrouadurig, Franseza a zifennas groñs outañ eun deiz, mont
hiviziken dre an hent-se.

Mikaelig a zelaouas e vamm, met, avat, ne zalc'has kont ebet eus ar pez
a oa bet lavaret d'ezañ. Pa c'houlenned digantañ perak e kendalc'he da vont d'ar
chapel, e responte-bep gwech :

« N'ez an ket di va unan, eun itron gaer a deu d'am c'herec'hat hag a ro an
dorn d'in da vont. Eno e tesk d'in penaos pedi. »

Eun droiad, ar vamm, a c'hoanteas hen diarbenn a-grenn. Hel lakaat a
reas en eur gambr hag e prennas an nor warnañ. Poan gollet, rak, prest goude,
e voe kavet a-nevez, er chapel, o pedi war e zaoulin, koant ha fur evel eun ael.

« Va mignonig, a lavaras ar vamm, trubuilhet nêt, met penaos-ta ec'h eus
te gallet dibrenna dor da gambr ? » — « An Itron gaer eo adarre », a respontas
ar paotr.

Adalek an oad-se, Mikael a zo merket evit atao. Mamm Doue eo her c'hemeñ dindan he skoazell. Ne ehano mui, dervez ebet, da gemeret soursi anezañ ha da zont war e zikour.

E vloaveziou kenta, Mikaelig o zremeno evel ar vugale all eus e oad hag eus e reñk. Abred e vezo lakaet er skol gant beleien, da genta, e Sant Fregant, goudeze e Plougerne, diwezatac'h e Plouzeniel, el lec'h ma chomo c'houec'h vloaz. Eno eo e santo e galon o tomm evit Hor Zalver Jezuz-Krist hag e startaio ennañ ar youl d'en em ouestla-holl en e servich. Koumañs a ra ober pini-jennou kalet ; klask a ra an dro da ober katekiz d'ar vugale ha da re yaouank e oad. Met, a-barz pell, Plouzenieliz a raio d'ezañ paea ker e hardizegez santel. Kanned e vezo ganto, goapaet ha gwall-gaset, evel ma vije bet eun den fall...

II. — E YAOUANKIZ

Mikael en deus bremañ trivec'h bloaz. Den yaouank kaer eo ha desket mat. Met c'hoant en deus, ha mennoz e dad eo ive, pignat uheloc'h e skeul an deskadurez. Da beseurt skol mont ? E Breiz ar skolioù bras a zo bet dismantret gant ar brezelioù.

Aotrou Kerodern a ra e sonj kas e baotred da Vourdel. Skol-veur ar gêr-se a zo brudet ha darempredet gant e-leiz a yaouankizou, a bep bro. Hogen, e-lec'h ma ve kalz tud yaouank, e vez ive freuz, meur a-wech. En o zouez, ar Vretoned n'oant ket ar re ziveza.

Dre ma z'oa eur paotr krefiv ha dispont, Mikael a voe chachet gant e vreudeur da zikour difenn e genvroiz. Met ar Werc'hez a veilhe war e zervicher ha ne zaleas ket d'hen tenna eus an hent risklus-se.

Eun abardaevez-noz, m'edo o vont d'en em glevet gant e gamaladed, e klevas, souden, eur vouez o lavaret d'ezañ :

« Chom a-sav ! » Mouez an Itron Varia oa :

« Bez sentus ouz Doue, emezi, ha kerz da heul va mab. Bez atao izel a galon ha gra fae war ar bed ! » Mikael a oa trec'het war an taol. Toui a reas stourm, hiviziken, dindan banniel Jezuz-Krist hepken.

Evit miret aesoc'h e bromesa, e kuita Bourdel, prest goude, evit mont da Agen da genderec'hel e studi.

Epad ar pevar bloaz ma chomo er gêr-se, e tistro da vat ouz Doue. Labourat a ra da c'houit eneou e vreudeur. Ar joa en deus da welet meur a hini o chench buhez a-grenn.

E Agen, Mikael an Nobletz a ra anaoudegez gant eur breizad, ginidik a Blouyann, Per Kintin, a gavo diwezatac'h war e hent hag a vezo e genta skoazellour e labour ar misionou.

Daoust d'ezañ da ren eur vuhez divlam-kaer, hon den yaouank ne voe ket espernet gant an teodou fall. Pa glevas ano eus ar pez a lavared diwar e benn, e voe glac'haret kenañ. Ne gollas ket kalon evelato, Kreski 'reas e bedennou. Eun dervez m'edo daoulinet en e gambr, an daélou 'n e zaoulagad, Mamm Doue a en em ziskouezas d'ezañ en eur lavaret e brezoneg, rak e brezoneg eo e komze atao outañ :

« Mikaelig, na leñvit ket, va Mab ho tiwallo hag ho sikouro. »

Hag e kinnigas d'ezañ teir gurunenn skedus ; kurunenn ar c'halonou gwerc'h ; kurunenn an doktored ha kurunenn ar re a ra fae war ar bed. Ar burzud-se, ken dous da galon Mikael a zigouezas da viz Genver 1600. Gant e 23 bloaz edo neuze ha graet mat oa gantañ ar zont da veza beleg. Gelllet en defe reseo e berr amzer, an urzioù sakr. Met gwelloc'h e kav gortoz c'hoaz. Gouzout a rae seul zesketoc'h e vefe, seul aesoc'h e vije d'ezañ kelenn an eneou hag ober vad d'ezo. Mikael a zistro eta da Vourdel evit studia ar skianchou sakr epad pevar bloaz all. Hen ober a ray gant kement a aked hag a furnez ma teuo da veza, hervez testen e vistri-skol, an den gouizieka eus a Vreiz.

III. — TRUBUILHOU KENTA : AR VELEGIAJ

Da gement hini a fell d'ezañ mont d'e heul, Hor Salver a ro an tañva eus kalur e boanioù. Mikael ne oa ket espernet.

Goude beza peure'hraet e studi, an den yaouank a oa dizroet da Blougerne. O veza klevet komz eus e zeskadurez, Eskob Leon a c'hoanteas ober anaoudegez gantañ. Ne zaleas ket da welet pegen gwir oa an holl vad a lavared anezañ. Kinnig a reas da Vikael ar c'haera plasou a c'hellje da rei en e eskopti.

Ar c'helou-se a gargas kalon aotrou Kerodern a joa. Goude beza koustet ken ker d'ezañ, ar mab-se a oa erfin o vont da lakaat ar Vrud da goueza war ar familh. Pourchu a reas war Mikael da gemeret eur plas a en em gavas goulo, nebeut amzer goude.

Met hemañ a lavaras evit e holl zigarez n'en em gave ket galvet d'ar stad a vuhez-se, ez oa ar garg-se dreist e c'halloud hag e krede beza galvet gant Doue da rei misionou e Breiz-Izel. Lavaret a eure c'hoaz ez oa gwell gantañ beza karget da ziwall al loened eget beza lakaet e penn ar barrez vrasa.

O klévout kemend-all, an tad a yeas kement a gounnar ennañ ma roas urz e vije karget e vab da ziwall al loened.

Mikael a zentas war an taol, hep trouc'ha eur ger. Met evel ma kendalc'he bepred da ober fae war an holl gargou kinniget d'ezañ, e dad hel lakeas, eun deiz, er-mêz eus an ti.

Mikael a en em dennas e ti e vamm-magerez, eur wreg paour a vadou an douar met pinvidik a vertuzioù. Eno e vevas en dienez ar vrasa, disprijet gant an holl, eurus koulskoude da gaout e lod da eva eus kalur c'houero e Zalver. Goude beza chomet ouspenn eur miz er stad reuzeudik-se, e lakeas en e zont mont da Bariz evit goulenn kuzul digant eur beleg vertuzus bennak. Ar beleg ma tigoras d'ezañ e goustians, an Tad Cotton, hen alias da reseo an urzioù sakr, hep dale pelloc'h, ha da gerzet, hep aon ebet, dre an hent diskouezet d'ezañ gant Doue.

Mikael a heulias e ali, hag o veza bet graet beleg, e Pariz, e tistroas da Blougerne evit lavaret e oferenn nevez.

Araok en em rei d'ar misionou, evel m'oa galvet gant Doue, ar beleg yaouank a c'hoanteas c'hoaz gortoz eur pennad. Ken pounner e kave ar garg edo o vont da gemeret, ma sante an ezomm d'en em bourchas araok, o pleustri, o pedi hag oc'h ober pinijenn.

En em denna reas en eul lec'h distro, demdost d'an aod, e parrez Tremec'h, hag a zo hirio eur c'harter eus Plougerne.

Souezus eo ar vuhez rust a renas eno, epad bloaz, en e lochennig plouz.

Falvezout a rae d'ezañ, dre e binijennou, paea lod eus dle ar bec'herien a lakafe da zistrei ouz Doue hag ive prena ar grasou a ziskennfe, dre e zaouarn, war o eneou.

Epad m'edo eno, e-unan gant Doue, eo ec'h ijinas an taolennou a dlle bruda e ano da viken.

IV. — MIKAEL O LABOURAT E PLOUGERNE

Edoug ar bloavezioù m'en doa tremenet e Plouzeniel, ez-yaouank, hag e Plougerne, abaoe m'oa peure'hraet gantañ e studi, Mikael en doa bet tro da welet pegen dinerzet oa ar feiz er c'halonou. Ma n'oa ket maro, oa da vihana, hanter vouget dindan an drez hag ar spenn. Gizioù fall ha dizursioù a oa en em zilet e pep lec'h. An dud a oa deuet da ankounac'haat o c'hreañsoù hag eno edo ar riskl brasa evit ar feiz.

Kenta preder Mikael an Nobletz o tigeri e labourioù abostolik a vezo diski o c'hreañsoù hag o fedennou d'ar re vihan ha d'ar re vras, displega d'an holl al lezenn glisten.

E Plougerne eo, en e barrez, etouez e gerent hag e anaoudegez, a taolas an had kenta, e douar an eneou. Ma voe gounezet meur a hini gant e gomzou, kalz ive a reas skouarn vouzar outañ.

Dous evel eun oan gant ar vugale, Mikael a skoe dizamant war bec'hejou ha siou fall ar re vras. Ar wirionez a zo kasatis da glevet. Ailhoned ar barrez a glaskas meur a wech en em gaout gantañ war an hentchou ma tremene dreizo, evit skei gant ar hini a lesanvent : ar beleg foll.


Abalamour d'e zoare da veva, beleien ar barrez, o-unan, a en em zavas en e enep, hag hen tamallas dirak vikel-vras Kastell.

E dad a jomo atao kounnaret outañ. Poan a rae d'ezañ gwelet e vab o ren eur vuhez paour ha dister, gwisket fall, hep karg ebet. Eun deiz zoken, dallet gant e gounnar ez eas war e lerc'h gant eur vaz, da glask lopa warnañ.

Antronoz, eun deiz sul, Mikael a bignas er gador hag a reas eur brezegenn gaer war deveriou an tadou hag ar mammou ha deveriou ar vugale. E dad, an aotrou a Gerodern, a oa en iliz, hag o tont d'ar gêr, e lavaras d'e wreg : « Mat ! eur prezeger dispar eo hor mab, evelato. E zoare beva a zisplij d'in, met, er gador, e lavar traou kaer. Hent an neñv a ziskouez. »

Kalon aotrou Kerodern en em zigore d'ar c'hras. Nebeut amzer goude, Mikael en devoa ar joa vras d'e welet o cheñch santimant en e gêñver, hag o tistrei da vat ouz Doue. E vamm ive a voe gounezet gant diou eus e c'hoarezed, Marc'harit hag Anna, a dlle gouestla ar rest-eus o buhez, e servich ar vugale hag ar beorien. Ar greun-se a zavo ha re all a eosto...

V. — MISIONER E BREIZ-IZEL



Tachenn-labour ha kroaz Dom Mikael.

ar c'hreiz eus e visionou. Kalz eneo a lakeas enni da zistrei ouz Doue.

Prezeg a eure e Landerne e tro ar bloaz 1614. Eno eo evit ar wech kenta e reas implij eus an taolennou en devoa graet en e ermitaj e Plougerne.

Taolet gantañ an had kenta e-touez e genvroiz, Dom Mikael, rak an ano-se a roed d'ezañ abaoe m'oa beleget, a oa prest evit ar gefridi fiziet ennañ gant Doue.

Eun tregont vloaz bennak a c'helle kaout, d'ar mare-se; an oad kaera da labourat da bep den. Mikael, gwir eo, a oa dija dinerzet en abeg d'e binijennou, met en e greiz ez oa eur galon greñv ha tomm.

Goude beza tremenet eur pennadig e kompagnunez an Tad Kintin, en eur gouent, e Montroulez, Dom Mikael, galvet gant Eskob Landreger, a yeas, gant e vignon, da rei e visionou kenta en eskopti-se. Meur a drubuilh a gavas an daou visioner war o hent, met bennoz an neñv a gouezas ive puilh war o labourou.

Etre daou ha tri bloaz e padas misionou Bro-Dreger. Ac'hano ez eas da Eusa, da Volenez ha da Enez-Vaz.

Dizro d'an douar bras ez eas da jom da Lok-Maze Penn-ar-bed, eur gêr eus ar re gaera, d'ar mare-se. Ober a reas eus ar barrez-se evel

Eus a Landerne, ar misioner a yeas da Gemper, ac'hano e teuas d'ar Faou. Goudeze ez eas da Gonk-Kerne, da Bont-n'Abad, da C'hwaïen, da Enez-Sun. Eno eo e tibabas hag e kentelias *Franch ar Su* hag a vezo diwezatoc'h person an enezenn.

O tistrei eus Enez-Sun, Mikael a voe karget, eur pennadig, eus parrez Meilars, eur barrez vihan eus kichen Pont-e-Kroaz. Met ne jomas ket pell eno, rak prezeg a ranke e lec'h all ive. Pedit a reas neuze ar Werc'hez da ziskouez d'ezañ ar Vro e c'hellfe enni labourat ar muia evit gloar Doue. Selaouet e voe e bedenn. An Itron Varia, hag he doa e hentchet ken alies betek neuze, a en em ziskouezas d'ezañ skedus holl ha gant he biz e verkas tour Ploare, tour uhel ha kaer e kichen mor Douarnenez. « *Galvet out, emezi, da vont da labourat el lodenn-se eus eritaj Sant Kaourantin. Bez leun a nerz-kalon en despet d'ar c'hroaziou az pezo da zougen. Sikouret e vezi.* »

VI. — DOM MIKAEL E DOUARNENEZ

D'ar mare ma lakeas ar misioner e dreid enni, Douarnenez n'oa ket c'hoaz parrez. Bez ez oa chapelou, amañ hag a-hont, met an iliz parrez oa Ploare.

E Douarnenez an dud a oa dizesk bras war o relijion. Kalz ne ouient na Pater, na Noster. Ober a raent ar c'hiz hag e teuent d'an oferenn, met hep gouzout petra oa. Mikael a en em lakeas da zeski d'ezo ar misteriou a dleer da anaout evit beza salvet. Da genta e brezegennou ne blijent ket.

Tud Douarnenez a en em gave mat evel ma edont. Ra vefent lezet e peoc'h ! Met ne vezint ket lezet e peoc'h. Ar misioner a zo deuet en o zouez a zo eur penn kalet, a lavaro d'ezo ar wirionez, ha goude ma ve kasas d'o diskouarn. Kaer o d'ezo en em glemm, rei d'ezañ an ano a randonen, a zorser, Mikael ne ehano ket.

Bemdez e prezege hag e rae katekiz e chapel Santez Helena. A nebeudou e kreske niver an dud da zont d'e zelaou, hag abenn daou vloaz en doa gounezet ar bedervet eus tud Douarnenez. Koulskoude en devoa eur mor a drubuilhou da dreuzi. Dournet e voe a bep seurt gevier diwar e benn. Klasket e voe zoken e laza.

Eur person, nevez deuet da Bloare, a gavas edo a re en e barrez, diskuilh a eure anezañ da eskop Kemper. Dem-goude e teuas urz da Zom Mikael da zizrei d'e vro. Ar c'helou-se a lakeas Douarnenez e kañv hag e gouelvan. Ar misioner, eus e du, a oa doaniet bras o rankout kuitaat bugale edo o kelenn pemp ploaz war n'ugent a oa :

« Teir merc'h spirituel a zo em c'halon, a lavare den Doue, dounoc'h eget ar re all : Montroulez, Konk-Lokrist ha Douarnenez. »

Met Douarnenez eo a garie ar muia : « Rak eno, emezañ, am eus bet muioc'h a boaniou da c'houzañv, muioc'h a c'hrasou war va labour, hag eno am eus kavet muioc'h a eneo mat, distag o c'halon diouz an holl draou krouet ! »

Pa rankas kuitaat Douarnenez, Mikael en doa 63 bloaz. Skuizet oa gant e labourou hag e binijennou. N'eus forz. Labourat a raio c'hoaz keit ha ma c'hello ober.

VII. — E VLOAVEZIOU DIWEZA

Digouezet a nevez e Konk-Leon, ar misioner kalonek a stagas adarre d'al labour. Bemdez e rae katekiz, e prezege er chapelou pe en tiez. Evit lakaat da badout ar c'hiz da rei kelennadurez kristen e poanias da c'hounit beleien ar parrezioù. Met gwas peza a oa, ar re-mañ, meur a hini anezo, ne ouient ket a vrezoneg. War e ali, person Plougar a en em lakeas da zeski brezoneg hag a c'hellas, abenn eur pennad, kelenn e barresioniz, evel m'edo e zever hen ober.

Kerkent ha ma klevas oa dizroet evit mat an Tad Maner da Gemper, e

kasas kemennadurez d'ezañ da zont d'e welet. P'en em gavas, kalon Dom Mikael a dridas en e greiz ; gervel a eure e amezeien hag e lavaras d'ezo : « Va bugale ger, setu amañ hiviziken, rener misionou Breiz-Izel, digaset eo gant Doue evit rei skoazell d'ar Vretoned da vont d'ar baradoz ! » hag e roas war an taol d'an Tad Maner e gloc'hig hag e daolennou ha leun a aliou fur.

« It kentoc'h d'ober misionou er parrezioù diwar ar mēz, emezañ. Aze n'eus ket ezomm da gaout aon rak al lore'h evel er c'herioù. Gant an dud vras ha pinvidik e vez kemeret kalz poan evit nebeut a frouez. »

Evel pa n'en dije ket c'hoaz graet a-walc'h evit Doue, Dom Mikael a gredas goulenn digant Hor Zalver kaout perz en e hoanion. Selaouet e voe. War-dro tri bloaz araok ma varvas e tisklerias gant peseurt doare kleñved e kuitaje ar bed-mañ.

O c'houzout e tostae ar maro d'ezañ e reas e c'houre'hennou diweza da dud Douarnenez. Dre destamant e leze ganto eul lodenn eus e daolennou. Gant e gerent e lezas eur voestig hag enni eur pezh kaer a netra.

War-dro gouel Mikael 1651, e izili a zeuas holl da zounna. Epad seiz miz penn da benn e chomas evelse, hep tamm nerz, heñvel ouz eur bugel bihan a ranker da gas ha da zigas. A-hed eur miz, koulz lavaret, e voe en e angoni : abenn diou wech e kredas an dud oa maro. Epad ar stourmad diweza edo an tan ennañ. Met e galon a oa leun a joa hag a zouster ; al levenez a bare hepred war e dal hag en e zaoulagad betek ma tennas e huanad diweza, etre divrec'h e vab karet, an Tad Maner, d'ar 5 a viz Mae 1652. Edo er pempzekvet bloavezh ha tri-ugent eus e oad. Kerkent ha ma tremenas, e voe leun an ti a c'houez vat.

Ar c'helou eus e varo a yeas buan dre ar vro hag an holl a zirollas da leñva ; e enebourien zoken a roas neuze meuleudi d'ezañ ; galvet e voe *Tad ar Vretoned*, diskleriet e voe a vouez uhel e zantelezh. E gorf, evel m'en doa goure'hennet, a voe kaset da Lokrist ; eno, en desped d'e c'houlenn, e voe sebllet, nann etouez ar re baour, met en eur bez pinvidik. Diwezadoc'h, e 1858, gant aotre an aotrou 'n Eskob, e voe kaset e gorf da iliz nevez Konk, e-lec'h ma tiskuiñ e peoc'h, da c'hortoz ma vezo gallet skriva e ano war roll an dud-eurus.

Chom a ra ganeomp holl en em erbedi outañ gant muioc'h-mui a fiziañs, ma raio an daou virakl, a lakaio da c'houlaoù an deiz kaer-se, hep dale.

L. Bleunven.



**Ar Werc'hez a ginnig
da Vikael teir gurunenn :**

Kurunenn ar c'halonou gwerc'h,
Kurunenn an doktored,
Kurunenn ar re a ra fae war ar
bed.



PREZEGENN an Aotrou 'n Eskob Duparc e oferenn Bleun-Brug DOUARNENEZ, E 1929 ⁽¹⁾

Mes frères,

Avant la clôture du BLEUN-BRUG, je veux lui donner pour protecteur et pour inspirateur le prêtre qui fut, il y a 300 ans, l'apôtre de Douarnenez, et qui, avec son disciple, le P. MAUNOIR, a fait plus qu'aucun prêtre

d'aucun siècle pour continuer l'œuvre de nos vieux saints et pour sauver l'âme bretonne : **Dom Michel Le Nobletz.**

Il l'a sauvée en restaurant en elle cet esprit breton dont vous voulez être les mainteneurs. Il a restauré et épuré cet esprit breton en le pénétrant d'une foi plus éclairée et plus profonde.

J'ai entendu à Rome, les juges de l'héroïcité de ses vertus déclarer dans des conversations publiques, que son apostolat a égalé les missionnaires les plus puissants et les plus saints de l'Eglise primitive.

Si pour conquérir les Bretons, il faut un Breton authentique, Breton par le sang, par la langue, par l'âme, voici l'apôtre sans rival.

Dom Michel est de vieille souche Bretonne et de famille noble solidement chrétienne. Interrogez les habitants de Plouguerneau. La langue qu'il parle est le Breton. Il l'apprend sur les genoux de sa mère. Et c'est dans cette langue que la Sainte Vierge l'entretient elle-même.

D'ailleurs, mes frères, en ce temps-là, on parlait le breton dans toute la Basse-Bretagne, dans les châteaux et les presbytères comme dans les villages. C'était la langue du pays, et, dans les maisons où se formaient les jeunes clercs, on apprenait le latin non pas par l'entremise du français, mais par l'entremise du breton, et on le savait très bien.

Dom Michel, dans le manoir familial, avait parlé le breton dès sa petite enfance. Et comme il avait une intelligence très vive, avec une âme d'artiste, il se perfectionna facilement plus tard dans l'usage de sa langue maternelle, surtout quand il commença son apostolat.

Il apporta alors en chaire une langue pure de toute expression scolastique et ordinairement dépouillée des citations latines qui encombraient les sermons de l'époque.

Il s'appliqua donc à parler dans le style même du peuple, et pourtant mieux que le peuple, gardant la note simple de prêtre catéchiste, mais évitant de tomber dans la trivialité qui n'eût pas convenu à la dignité de son ministère.

Il disait un jour : « J'aime le rustique discours et le rude langage ». Il savait bien que la vraie manière d'entrer en contact avec l'âme du peuple, c'était de lui parler sa vraie langue, telle qu'il aime à l'entendre sur les lèvres des autres.

(1) Ne zistagomp diouz ar brezegenn nemet al lodenn genta.

Il n'atteignait sans doute pas la perfection que recherche et qu'obtient aujourd'hui un groupe d'écrivains décidés à donner au breton une pureté académique. Mais il réussissait à la parler comme le paysan de son temps.

Le prêtre qui arrive à manier ainsi la langue bretonne, séduit réellement son auditoire et finit par triompher parfois des hostilités les plus tenaces.

Un paysan était en guerre avec son recteur. Or le recteur parlait si bien le breton que, chaque fois qu'il montait en chaire, son ennemi, amateur de beau langage lui aussi, était au premier rang de ses auditeurs, et, en rentrant chez lui après l'office, il ne manquait pas de dire : « Eh bien, je vous assure, quand il prêche, je me passerais bien de dîner pour rester l'entendre tant il y a de charme dans sa manière de dire ».

Ainsi grâce au charme et à l'harmonie de la langue, grâce au naturel de la diction et à l'élan oratoire, la vérité passait, la vertu entraînait, et l'âme se renouvelait. C'était aussi le premier moyen d'action de Dom Michel sur l'âme bretonne...

Ao. 'n Eskob Duparc.

Karantez Dom Mikael e kenver Doue

DOM Mikael, m'en deus lakaet an holl vertuzioù da bara en e vuhez, en deus roet, dreist pep tra, skouerioù dispar a garantez e keñver Doue.

Dom Mikael n'edo ket war an teod hepken e garantez evit Doue ; he diskouez a rae, dale'h-mat, dre oberou santel e vuhez. En e labourou, ne glaske nemet eun dra hepken : lakaat Doue da veza anavezet, karet ha servichet gwelloc'h gant an dud.

Eur merk anat eus e garantez virvidik a gavomp ive en dispiljadur a zante en e galon pa wele en-dro d'ezañ eneoù ha n'o doa ket a sklerijenn war gement a-zell ouz Doue. Eun dervez e voe gwelet o skuilh daerou c'houero abalamour en doa kavet eun den koz dizek kenañ war gwirionezioù brasa ar relijion.

Dom Mikael pa gelenne ar re all diwar-benn karet Doue a lavare d'ezo : « Ne c'heller diskouez eur gwir garantez nemet war bouez gouzañv eur boan bennak evit an hini a garer ». Heñ e-unan a heulie bepred an ali-se a roe d'ar re all. A-heb e vuhez e voe rannet gant kroazioù pounner ha diniver. Gouzañvet en deus bet a bep seurt poanioù en e gorf, en e spered hag en e galon ; gouzañvet en deus bet a-berz pep seurt tud, dismegañs, goaperez ha zoken a-berz e gerent tostà, a-berz ar re a dlle beza roet an dourn d'ezañ da labourat.

Daoust pegen bras oa e boanioù, e garantez evit Doue a oa brasoc'h c'hoaz. Laouen e vije bet o c'houzañv holl dourmañchoù ar verzerien, hag, evel ma tisklerias e-unan : ar c'hoant-se a oa diwanet en e galon diwar e garantez evit Hor Zalver stag ouz ar groaz. Karantez Dom Mikael a rae d'ezañ kaout diaes, pa zonje n'en doa nemet eun teod hepken da veuli Doue hag eur galon hepken d'e garet. En eur welet dirak e zaoulagad ar mor bras hag an aochou ez oa douget da lavaret : « O-va Doue, o me' garfe kaout ken alies a deod d'ho meuli, ken alies a galon d'ho karet hag ez eus a verad dour er mor hag a c'hreunenn draez war an aochou ».

KANTIK

en enor an Den Venerabl Dom Michel Nobletz

Ton : Kantig ar skol gristen.

DISKAN

8

Aotrou Dom Michel benniget
Mignon Doue hon Tad karet
Mirit d'hor bro feiz hon tu koz
Ma zaimp ganeoc'h d'ar baradoz.

An tan a skarz an aour melen,
Ar boan a ziskouez neb zo den ;
En hent ar groaz, c'houi den santel,
A zesko kelenn Breiz-Izel.

1

Dom Michel, enor Plougerne
Hag enor Breiz-Izel ive,
Eus ho kavell betek ho pezh
Warnoc'h e par ar Zantelez.

9
D'ar bed, d'ar c'hig, c'houi a zo
[treac'h
E lochennik soul Tréménac'h ;
Ho korf a gren, mes hoc'h ene
A drid gant eurusdet an Ne.

2

Ha tad, ho mamm, gwir gristenien,
Ho magerez e Kerodern,
En hoc'h ene, bugel eurus
A zile karantez Jezuz.

10
Beleg dispar, gwir abostol,
C'houi vale var roudou Sant Pol :
Chenchet a grenn eo Plouerne
Dre ho labour ha gras Doue.

3

Da bevar bloaz, eun ltron gaer
Ho rene betek an aoter ;
Ha d'an daoulin er chapelik
E pedec'h evel eun elig.

11
E Montroulez, e bro Dreger,
Gant an Tad Kintin, ho preur ker,
Heb aoun ebet, heb espern den,
C'houi brezeg al lezenn gristen.

4

War ho studi, e peb danger
Hag en ho kroazioù ker pounner
Biskoaz n'he deuz manket Mari
D'ho tiouall, d'ho konforti.

12
Ho taolennou misterius
Hag ho sarmonioù ken nerzus
Er c'herioù koulz hag er mêzioù
A ra kalz vad d'an eneoù.

5

Dre ho lignez, ho kouiziegez,
Ar pezh 'zo gwell, dre ho furnez
Ho poa da joaz er c'hargou kaer ;
Choazet ho peus kroaz hor Zalver.

13
Mez ar galon 'zo en ho kreiz
Zo bet ato d'an Arvoriz,
D'an Arvoriz, tud rust, kalet,
Yac'h a galoun, eun a spered.

6

Evit beza holl da Zoue
Ha trec'hi krenn ar vanite,
Petra n'ho peus ket gouzanvet
En ho kaloun, en ho spered ?

14
Konk, Eusa, Batz ha Molenez,
Sizun, Gwaien, Douarnenez,
D'eoc'h en deus roet ar pezh wella
Eus e vuhez, ha roet gant joa.

7

Tremen 'vit eun diskiantet
Kaset da ziwall al loened,
Setu ho stad, Michel Nobletz,
E kreiz an hu, ar goaperez.

15
Na pebez den, martoloded,
Eo hon abostol benniget
Pa gemer da gador zarmoun
Eur vag lusket var ar mor down !

16

Prezeg a ra ar Binijenn
Hag heb damant, ar bec'herien,
Evit kastiza o memproù,
A zaoubleg kerdin o bagou.

17

Hentchet varzu Douarnenez,
Gant e vamm dener, ar Werc'hez,
Michel a ra labour ar Zent
Hed ouzpenn pemp bloaz varn' ugent.

18

Pa zone kloc'hig dom Michel
Ha pa gane eur werz santel
An holl war e lerc'h a rede,
En-dro d'ezañ en em vode.

19

Neuze gant dousder hag ijin
Ha dre vertuz ar c'hras divin
Gant e c'hoar Marc'harid Nobletz
E kelenne tud ar barrez.

20

E gomzou flour 'vel gliz an Ne
A zoure douar Kerne
Rak e plas grizioù ar pec'hed
E sav vertuzioù kaer meurbed.

21

Ne glevet a bep tu bemdez
Nemet ar c'hantikou nevez
Kantet var eun ton dudius
D'ar Zent, d'ar Werc'hez, da Jezus.

22

Karet gant tud Douarnenez
Michel en em blij en ho zouez
Mez en despet d'e rann-galoun
E rank distrei da vro Léon.

23

E porzig Konk, e tal ar mor,
An den santel a gav goudor :
En eun ti paour, enk ha distro
E vev humbl betek ar maro.

24

Mar deo torret dre ar gozni
Ha brevet e holl izili,
Eo chomet drant, lemm a spered,
Ehan da gelenn ne c'hell ket.

25

Ar c'hloc'hig a ya c'hoaz en-dro
Hag ar vugale a drido
O teski gant hon den Doue
Penaos kerzet en hent an Ne.

26

D'ar re vras a deu d'e zelaou
E tispleg freaz an taolennou
Hag e laka doun er spered
Ar gasoni ouz ar pec'hed.

27

Dom Michel, en ho kurunenn,
E vanke c'hoaz eur berlezenn,
Goulen a rit beza seizet
Evit flastra ourgoulh ar bed !

28

Pa dosta termen ho puhez
Merzer a gorf, a garantez,
Gant an lfern oc'h gwall gaset
Mez gant Mari oc'h kennerzet.

29

Goude teir basion skrijus,
Hoc'h ené 'zav d'an Neñv skedus,
Diwar ar groaz, d'ar Baradoz,
Elec'h m'emañ ouz hor gortoz.

30

E-harz ho relegou santel,
Ken enoret e Breiz-Izel,
Ra gresko c'hoaz ar miraklou
Ma kreskimp deoc'h an enorioù.

31

En deiz kaer-ma an Arvoriz
A galoun vat gant an Iliz
A gan, a bed hag a esper
E savoc'h prest war an aoter.

J.-M. M.

Aotre da voula :
Kemper, 1^a a viz Ebrel 1952.
J. CADIOU, Vikel-Vras.

Skoazellourien Dom Mikael an Nobletz

EVEL m'en deus graet Hor Salver, evel m'o deus graet ar re holl o deus klasket ober vad d'o breudeur, Dom Mikael en deus klasket ha kavet tud a volentez vat d'e zikour.

En holl gornioù-bro, m'en deus labouret enno, tud a bep oad hag a bep stad o deus roet an dorn d'ezañ, betek zoken ar vugale.

Dom Mikael a oa eur mestr kelenner. Evit deski ar c'hatekiz d'ar vugale, den barrekoc'h eget ar vugale o-unan. Ar re-mañ a veze rannet a-strolladoù pevar pe bemp. P'en deveze eur strollad desket respont d'eur goulenn e veze karget da zeski da dri pe bevar all...

Da vision Enez Vaz, e 1612, e kasas gantañ eur paotrig da servichout da skouer evit ar c'hatekiz. Ober a rae goulennou outañ, dirak ar vugale all, evit rei muioc'h a hardisegez d'ezo da respont. Goudeze, evit kalon d'ezo, e roe d'ezo eur rekompan bennak. D'ar merc'hed bihan e veze roet spilhou.

Met e-touez ar merc'hed, dreist-holl, eo e kavo Dom Mikael skoazellou-rezed dispar.

Ar genta a c'heller da venegi eo e vamm-magerez. N'eo ket deuet he ano betek ennomp. Met o komz diouti, servicher Doue en deus lavaret : « Muioc'h a anaoudegez vat am eus d'ezhi da veza va maget gant he fedennou eget gant he laez. » Evel m'hon eus skrivet, uheloc'h, ar yaouez a feiz-se, eo a roas digemer d'ezañ en he zi paour, goude m'oa bet silapet er-mêz eus ti e dad. Hag epad m'edo eno, hi eo her c'hennerzas da heulia penn da benn « hent disprij ar bed, ha follentez ar groaz. »

An diou a lufro ar muia, dre o zantelez, eo, a dra-sur, diou c'hoar garet Dom Mikael e -unan : Anna ha Marc'harit.

ANNA AN NOBLETZ a vevas kuzet, ha didrouz, en-dro da Gerodern, evel eul leanez, o kemeret soursi ouz he zad hag he mamm, aet war an oad, hag ouz peorien hag emzivaded Plougerne. Dre he fedennou, he finijennou hag e oberioù a drugarez e tennas bennoz puilh an neñv war labourioù he breur.

MARC'HARIT AN NOBLETZ, hi, ne varc'hato ket da vont d'e heul en e visionou, bez e vezo en e zervich hag e frealzidigez da euriou an drubuilh :

« Karantez c'hoar, Breur n'her goar. »

a anzave Dom Mikael, o skriva da Varc'harit hag e lavare ouspenn :

« Karantez Breur, Karantez Tad. »

En he yaouankiz e oa troet kenañ ouz plijadurezioù ar bed, met, a-nebeudou, gant kentelioù he breur, e savas uhel meurbet e skeul ar zantelez. Muioc'h ez eas war arak, e bloaz, eget re all e tri ugent vloaz, a lavare Dom Mikael.

Ober katkiz d'ar vugale ha d'an dud vras, displega d'ezo an taolennou, kelenn ar plac'hed yaouank, kesta evit ar re baour, setu he labourou ordinal e Montroulez, da genta, e Kon-Léon, e Kemper hag e Douarnenez. Goude beza bet, a-hed he buhez, ken madelezes, war he maro e roas eur skouer a garantez kaeroc'h c'hoaz. Kinnig a reas he buhez evit miret o mamm da bemp krouadur, yaouank c'hoaz.

Mervel a reas diwar ar c'hleñved he doa goulennet he-unan digant Doue, dre garantez evit he nesa. Ano Jezuz a voe ar gomz diweza a zeuas diwar he muzelloù. D'ar 17 a viz Gwengolo 1633, eo e rentas he ene kaer da Zoue.

He c'horf a voe sebeliet e iliz Ploare, e-lec'h ma weler c'hoaz he bez. Kalz grasou a zo bet resevet dre nerz he fedennou.

E Douarnenez, Marc'harit an Nobletz a gavas d'he zikour meur a yaouez all, ha dreist-holl teir intañvez, *Domnat Rolland, Kloadina Beleg* ha *Anna Geraudren*.

Souezus eo petra ne c'hell ket merc'hed kristen ober, pa vez entanet o c'halon, dre garantez evit Doue.

Dispar eo ar vad graet e Douarnenez, ha tro-wardro, gant an teir intañvez-se, oc'h ober katekiz, o tisplega an taolennou, oc'h entent ouz ar re baour hag ar re glañv.

Evit beza direbech en o andred, Dom Mikael, en e furnez, a c'hoanteas o c'has gantañ da Gemper, da welet an Ao. n'Eskob. Hemañ a reas goulennoù outo hag o lakeas da zisplega an taolennou dirazañ.

Ken mat e teuas ganto, ma lavaras kerkent :

« Kendalc'hit, emezañ, er-mêz eus an iliz ; en iliz e c'hellot respont d'ar beleg a raio goulennoù ouzoc'h diwarbenn an taolennou : »

Diwezatoe'h pa vezo tamallet da zigas nevezentiou er vro, ar misioner santel a skrivo eul lizer kaer evit en em sifenn ha n'en devezo ket a boan o stanka o genou d'e enebourien.

E kement parrez ma prezegas, Dom Mikael a c'hounezas evel-se merc'hed a galon, a zistruezas dirazañ hent an eneoù.

Eur ger, hepkenn, evit menegi *Franseza a Gizidik* eus a Vontroulez, eun dimezell a reñ-uhel, a reas eur vad souezus en he farrez Sant-Martin ; *Franseza Troadec*, eus Konk-Leon, eur vaotez a benn mard'oa unan, a anaveze ar galleg koulz hag ar brezoneg, ar saozneg hag ar spagnoleg hag a voe mamm ar beorien hag ar re glañv.

Ne c'hellomp ket, araok kloza roll skoazellourezed Dom Mikael, lezel a-goztez *Janned ar Gall* eus Konk. Istor he buhez a zo eur burzud. Eus mitez paour (n'he doa gallet morse deski na *Pater na noster*), e teuas kenteliet gant servicher Doue ; da veza goest da gelenn ar re all, ha d'hen ober brao ha frêz. Hi eo a entento ouz ar misioner en e gleñved diweza.

Ne zeblant ket en defe Dom Mikael kavet kement a skoazell a-berz ar wazed.

Kaout a reas evelato amañ hag a-hont meur a hini.

Ar brudeta eo *Fanch ar Su*, kabiten Enez Sun. Kenta m'her gwelas, da geñver ar Mision a reas en enezenn, e 1613, ec'h anavezase peseurt danvez den e oa. Dom Mikael a boagnas da zeski d'ezañ e relijion, gwelloc'h c'hoaz eget d'ar re all ; lezel a reas gantañ levriou santel da lenn hag e lavaras d'ezañ penaos ober evit dere'hel an dud war en hent mat. Skriva 'reas alies goudeze evit e gentelia ha rei kalon d'ezañ.

Pa zouaro an Tad Maner en enezenn, 28 bloaz goude, e chomo estlammet dirak al labour kaer graet gant an abostol kalonek, ha n'en devezo ket a boan o lakaat en e spered ar sonj da veza beleg.

Ret eo lavaret, gant gwirionez, an darn vrasa eus ar veleien, ne rejont ket a zigemer mat da Dom Mikael. Re rust e kavent e vuhez, kasaüs e breze-gennou, hag e zoare da gelenn an dud a zisplice da gals anezo. Servicher Doue a gavas en *Tad Kintin*, en devoa anavezet ez-yaouank, eur mignon feal ha start. Epad tri bloaz e labourint asambles e Bro-Dreger.

Divezatoe'h an Tad Kintin a deuio da Zouarnenez da rei an dorn d'ezañ. Er bloaz 1629 e varvo, e Montroulez, leun a viritou. Dom Mikael a leñvas d'ezañ.

Pegen rouez bennak e voe ar veleien a roas skoazell d'ar misioner en e labouriou, arabat kredi, koulskoude, ne gavas hini ebet. Menegi a c'heller person Eusa, eur chaloni a Gemper, an Ao. *Bozer*, hag an Ao. *Pennec*, eus Ploare, gounezet a-grenn ; hag a deuas da veza, a-c'houdevez, eun diskibl sentus.

Met kaera gounid a reas Dom Mikael eo an *Tad Maner*. E-lec'h ma ne reas ar c'henta nemet hada, hada er boan hag er goulvan, an eil a eosto gant joa sikouret alies gant ar re o doa graet brezel kalet da Zom Mikael.

« Ho kaset am eus, eme Jezuz, da eosti ar pezh n'eo koustet netra deoc'h ; re all o deus poaniet ha c'houi a zo deuet da gutuilh frouez o foan. »

Y. Creignou ha L. Bleunven.

Foll evit Doue

Ar Vretoned a zo tud a blij d'ezo, aes awalc'h, chom hep ober evel ar re all. Eun doare eo moarvat da broui o fersonelez d'an dud en diavaez, ha d'ezo o-unan. Aes eo d'eur seurt doug mont a-dreuz, ha war zigarez beza personel ez eus Bretoned ha n'hellont gouzañv renerez ebet.

Met n'eus doug ebet na c'hellfe servijout d'eun dra bennak ha trei da vat. Ha dre vras ne gav ket d'in e vefe fall eur seurt temz-spered, peogwir an Aotrou Doue e-unan, p'en deus graet eun dra bennak eus ar Vretoned war dachenn ar santelezh, en deus implijet e-unan ar stumm-se merket don en hon ene, hon tro da glask an avantur hag ar vuhez personel.

Ne c'houlenn ket an Aotrou Doue digant ar Sent, koll nag o ano, nag o gwad, hag o spered. Krouet en deus tud disheñvel, hag o lezel a ra disheñvel. Ezomm en deus eus tud disheñvel evit ober anezo sent e Varadoz : rak ne vefe ket plijus e Varadoz mar bije an holl Sent memes tra.

Kemeret en deus eta ar Vretoned evel m'emaint. Ha petra 'zo bet ? Eur bern tud iskis a welan e-touez Sent Breiz, evel pa vefe bet plijet ganto en em ziskouez iskis. Ne gav ket d'eooc'h e oa souezus evit tud e amzer eun den evel Erwan Helouri, pa roe e wiskamant d'ar paour-mañ-paour, d'ezañ da vale goude-se gantañ. Petra a lavarfec'h, Jezuz !, mar en em lakfe ho person da rei e soutanenn d'eur c'hasker bara eus ar barrez. Ha c'hoaz, kemerit Salaün ar Folgoat ; evit hemañ da vihana n'eo ket chomet an dud da dortal, p'o deus graet ar Foll anezañ, ha koulskoude furoc'h e oa egedomp holl, pa oa eur sant ha pa n'omp ket.

....

Mikael an Nobletz, heñ ivez, en deus plijet d'ezañ en em ziskouez iskis, ha mont en diavaez d'ar pezh a rae ar re all. Peseurt ezomm d'ober evel ar re all ? Penaos steki outo evit o lakaat da zistrei war-du Doue, mar ne reer nemet evel an holl dud, gant doareoù klouar ha dereat.

Tremenomp buan war e vloavezioù kentañ a binijenn e Plougerne, goude m'eo bet taolet er-mêz eus maner e dad, pa dremen e amzer oc'h o her katekiz d'ar vugale hag o kestal dre ar barrez evit ar beorien. Iskis awalc'h dija, evit eur paotr yaouank ha n'eo ket bet c'hoaz beleget zoken. Tremenoimp ivez war e vuhez goude beza bet beleget, pa zistro da gentañ da Blougerne, pa 'n em laka da gentelia ar relijion a di da di, a groazhent da groazhent, hep beza pedet gant an dud, o tebri evit e vevans nebeut a dra, tammou bara soubet en eur bouilhoñs, ha netra ken.

Heuilhomp anezañ e ti Dominikaned Montroulez. Antreet eo eno gant e vignon Pêr Kintin, hag e soñj mont da vanac'h, ha gant-se beza prezeger dre ar vro, prezeger an dud paour dreist pep tra. Setu her o 'n em lakaat a galon d'en em stumma d'ar vuhez kouent. Met ne oa ket graet evit chom e-barz. An avantur eo an hini a vo roet d'ezan gant Doue. A-hed e vuhez e vo evelse : ne c'hell ket chom keit-se er memes lec'h. E kouent Montroulez, setu amañ petra c'hoarvezas. E touez an itronezed a skoazelle ar gouent, e oa unan he devoa nevez kollet he merc'h, eur plac'h yaouank. Hag evit ober plijadur d'ar vamm, priol ar gouent en devoa asantet lakaat er chapel, poltred livet ar plac'h. Met an dud diwar ar maez, ha zoken tud eus kêr, pa zeuent da bedi er chapel, en em lake aes awalc'h dirak ar poltred o kredi e oa skeudenn an Itron Varia. Ne oa ket dereat dija ; met pezh a zo gwasoc'h, e oa dizolo mat bruched ar plac'h war ar poltred... Mikael evitañ da veza nevez flamm en ti, n'en devoa ket kuzet d'an Tad Priol e soñj mantret ; met evel just, hemañ ne felle ket d'ezañ displijout d'an Itron. Petra 'reas Mikael ? Kemer liou ha gwispon, hag e-pad an noz labourat ganto da guzat dindan eur gwiskad mat a liou ar bruched dizolo. Fulor ar Priol, aes eo kompren... Ha setu Mikael taolet er-maez eus an ti (an eil gwech e oa d'ezan bezan taolet er-maez,

taolet er-maez eus an ti ; araok avat, e voe skourjezet garo, mar plij, gant tud ar gouent, skourjezet evel hor Salver.

A-hed e vuhez e vo Mikael eur sin a enebiez, tud o welout ennañ eun den kaset gant Doue, eur profed gant lavarou an neñv war e vuzellou, ha reou all er c'hontrol o tamall anezañ da veza eur foll, ha da gas anezañ er-maez. Doareou iskis en devoa evit gwir, hor misioner, a-wechou.

En Enez Vaz e kofes an dud o kerzet, kement a oa da gofesaat ma n'helle ket ahendall dont a-benn anezo.

E Douarnenez evit gervel an dud d'e selaou, ar wech kentañ, ec'h en em lakas (gant asant ar person) da sachañ war ar c'hloc'h evel pa vije eun tan-gwall. Skei, skei a ra an taoliou : an dud nec'het da redek d'an iliz evit gouzout petra zo, pelec'h emañ an tan. He neuze da sarmoni anezo, ha da zisplega e oa alimet-kaer tan an ifern hag e oa d'en em ziwall diottañ. Echu ar brezegenn, ec'h ae endro an teodou.

N'hellomp ket kompren pegen souezus e tlee beza evit tud e amzer, doare Mikael d'ober gant merc'hed evit e skoazella en e visionou. A-hed e vuhez en deus bet diou pe deir ouz e harpa-bepred, merc'hed oc'h ober katekiz, o tispiega an taolennou : moarvat ne oa ket en iliz e prezegent, met evelkent merc'hed oc'h ober kenteliou a relijion d'an dud vras, setu a oa ken iskis ma rankas Dom Mikael en em zifenn meur a wech war an dra-se, dirak an eskibien.

E zoare da c'hervel ar merc'hed santel-se a zo ken souezus all. Perak da skouer eo Janed ar Gall en deus dibabet e Konk-Leon, evit ober anezi eur gategizerez, hag hi eur plac'h kreñv a gorf, bihan a spered, dizesk a-greñv war pep tra, relijion hag all ? Ouspenn-se, an dimezell Fontenay ma oa Janed ar Gall en he servij, ne felle ket d'ezi he lezel da vont na da heul Dom Mikael, na zoken da glevout e brezegennou.

« Perak koll amzer evelse, a lavare an dimezell. N'oc'h mat nemet da labourat. » Mont a reas an dimezell, fuloret o welout ne sente ket outi he matez, betek skei ouz Janed ar Gall, ha lavarout a bep seurt traou drouk a-enep Dom Mikael hag e genteliou katekiz. Pa ouezas an dra-se ez eas Mikael e fulor en ivez : gortoz a reas an dimezell da zont er-maez eus an iliz ar sul war-lee'h ; hag o tamall anezi dirak an holl, e kondaonas anezi da chom mut betek he maro, e pinijenn evit ar pezh he devoa lavaret. Ar pezh a c'hoarvezas. Dom Mikael, hen gwelout a rit, ne oa ket eur sant plastr, nag eur sant sukr. Setu Janed ar Gall kenteliel, stummet da brezeg, hag hi d'he zro d'ober katekiz dre ar barrez. Met pa lavaras Mikael d'ezi e tlefe mont goude-se e lec'h all, dre ar vro, e-gevret gantañ, e nac'has krenn ar plac'h kêz, hanter spontet gant ar soñj da vont pell eus he farrez. Nac'h a rae, met ne voe ket evit pell : nebeut goude-se, e kouezas klanv-maro gant ar vosenn, ha Mikael da c'houlenn outi en em ouestla da visiona, ha neuze, emezañ, e parefe. Asanti a reas Janed ar Gall, en em ouestla, ha dioustu e voe diglañvet.

Evelse e voe a-hed buhez Mikael, betek en e destamant. Eun testamant farsus an hini eo, ma ro d'e heritourien ha da dud e familh, « *eur c'haer a netra e-barz eur c'houfr*, evit mirout, emezañ, na vefent trabaset gant madou an douar, ha chalet gant an dud a lezenn ».

Eh dienez vrasa e varve an hini n'en devoa klasket a-hed e vuhez nemet disprizout ar bed, hag an testamant-se a zo evel e c'hoar zadenn diwezañ, evel an taol goap flemmusa taolet ouz pompadoù an dud gant an hini n'en devoa klasket beza nemet ar Foll evit Doue.

MAODEZ GLANNDOUR.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER IMP. CORNOUAILLAYS



PAJENN AR VUGALE

Bennoz Doue Dom Mikael

GOUDE prezeg, gant nebeut a frouez, da vare'hadourien Konk-Kerne, ez eas Mestr Mikael an Nobletz da Bont-n'Abad. Soñjal a rae : « Emichañs ez ay gwelloc'h an traou er gêr-mañ eget en hini all. »

Pa zegouezas, gwisket truilhek a-walc'h, dirak kastell Aotrounez ar Pont, e c'houlennas digant eur vaouez : « Mar plij, pelec'h e kavin e kêr paper da brena ? » Hag hi da respont, rust an tamm anezi : « N'ouzon ket, me ! »

Met a-boan he doa-hi kuitaet ar beleg, ma savas keuz enni da veza bet ken diseven. Hag hi ha konta kement-se d'he fried, Aotrou Porzmoro. Hemañ a oa eun den madeleuz-tre. Ha trist e vouez, e lavaras d'e vreg : « Gant dousder e ranker komz ouz ar beorien, ha gant resped ouz ar veleien. »

Evit rapari taol-teod prim e itron, e kasas-heñ eur mevel da glask ar beleg paour ha da rei dezañ eur c'hard-skoed en eur lavarout dezañ : « Va mestr, an aotrou a Borzmoro, a zo prest d'ho sikour e pep tra, hag a vo eurus d'ho tegerout en e di. »

Dom Mikael a zegemeras an aluzen kinniget dezañ hag a zeuas, nebeut goude, da welout e vadoberour. Evit trugarekaat hemañ e teskas dezañ he d'e diegez an doareou gwella da greski buan e karantez Doue. (1617.)

:::

Eun nebeut bloaveziou goude, p'edo Dom Mikael o chom e Douarnenez, e kouezas klanv Mari, merc'hig Aotrou Porzmoro. Ar bugel, d'he nao bloaz, a zeuas war he c'hroc'hen eun doare iorgnez. Medisin ebet ne ouie penaos he farea. Nemet unan, eus Kemper, Ponce e ano, ma vije roet dezañ 900 lur, en dije asantet ober eun esae ouspenn. Met hep beza tamm sur ebet da gas kuit ar c'hleñved. « Gwelloc'h eo deomp rei aluzen gant an arc'hant-se, eme an tad, ha se a vo suroc'h da barea hor bugel. »

Neuze e teuas sonj da Itron Porzmoro eus Dom Mikael an Nobletz, ar beleg paour. Goude goulenn a-gleiz hag a-zehou, e klevas edo ar beleg santel e Douarnenez. Kontet e voe dezi ivez unan bennak eus ar burzudou graet gant Dom Mikael evit savetei bugale.

Da skouer. Edod o vont da sebelia bugelig Marc'harid al Labous. Dom Mikeal a zeuas en ti hag a lavaras d'ar vamm : « Na glaskit den da zougen ar c'horf ». Pedi a reas hag ober sin ar groaz war genou ar bugel maro. Hemañ a zigoras e zaoulagad hag a dennas e anal. Lsanvet e voe goude : « Yann a zo bet maro ».

Herve Poullaoueg, c'houec'h miz, a oa bet mouget, e-pad e gousk, gant eur c'haz. Hemañ en doa en em astennet war genou ar bugel. Dom Mikael, gant sin ar groaz, a lakaas ar c'hrouadur da sevel a varo da veo.

« Eomp da welout Dom Mikael », a zivizas Aotrou hag Itron Porzmoro. Hag i war-du Douarnenez. P'edont o tegouezout er porz, setu an Tad Nobletz o tont d'o c'haout, evel ma vije bet ouz o gortoz.

Diskouez a rejont dezañ Mari, gwall-aozet gant ar c'hleñved spontus. « Hervez ar vedisined, eme an tad, n'eus mui netra da ober. » — « Kaezig ! » a huanadas Dom Mikael. Goulennata a reas ar bugel war misteriou brasa ar relijion, ha goude pedi, e reas sin ar groaz. « Kasit anezi da gousket, emezañ d'ar gerent. Skuiz eo ! » A-boan m'edo Mari viban en he gwele, m'en em roas d'ar c'housked.

E-keit-se ez ae Dom Mikael d'an oferenñ gant ar gerent. War-lerc'h e pedas ar re-mañ da zont d'o fred gantañ evit o zrugarekaat da veza degemeret anezañ gwechall e Pont-n'Abad. Goude ez ejont da selaou eur pezh : « Stourm ar vertuziou ouz ar siou fall », c'hoariet gant bugale Douarnenez.

Pa zistrojont d'o zi-loja, e kavjont Mari dibun ha pare. E poultrenn e oa kouezet an drouskenn euzus a c'holoe he c'horf a-bez.

(Diwar skridoù an Den eürus J. Mañer.)

K. Riou.

BLEUN-BRUG LEON

PLOUGERNE 2 A VEZEVEN (Lun ar Pantekost)

En enor da Vikael an Nobletz,

Dindan renadur an Ao. 'n Eskob FAUVEL.

Azalek 8 eur 30 : **Kenstrivadegou :**

Lenn, displega, kana (bugale skol) ;
Prezegerez, kana, konta (re vras).

— 10 eur 30 : **Oferenn-Bred** en iliz parrez,
kanet gant an Ao. Cadiou, Vikel-Vras ;
Prezegenn gant Ao. ar Go, person Plouneour-Trez ;
Kan gant lazou-kana Plouguer, Landivizio, Plou-
zeniel, Lokournan, ar Groaz-Ruz (Lambazelleg),
Treglonou, Gouesnou.

— 14 eur 30 : **Abadenn vras**, e Sant-Mikael.
Lodenn genta : **Koroll ha kan**, gant al Lazou-
Kana ; sonerien « Paotred ar Flamm » (Brest) ha
Kerfeunteun. Kelc'hiou-Keltiek Kerfeunteun, Poul-
dreuzig, Pouldregat, Lokorn, Plougasnou, Mon-
troulez, Rosko.
Eil lodenn : Abadenn war **Vuhez Dom Mikael**, ha
da heul prosesion vras Bro-Leon.
Bennoz ar Sakramant dirak ar chapel.

— 21 eur : **C'hoariva Brezonek an Aotrou Perrot** (er patro) :
1) **Ar Sant Nevez**, gant Plougerne ;
2) **Kornandoned sant Kadou**, gant ar Grouaneg ;
3) **Ar Vamm**, gant Lannilis ;
4) Ar gwella prezezer, kaner ha marvailher.
(An abadenn-mañ a vo roet ivez, en deiz araok,
d'ar sul da noz.)

Ar BLEUN-BRUG BRAS

A vo graet e LANDREGER, d'an 1, 2, 3 a viz Eost 1952,

En enor da Sant Erwan ar Vretoned.

Bez' e vo eno, en deizioù-se :

Sinema war Vreiz, prezegennou, peziou-c'hoari,
kenstrivadegou, prosesionou, oferenñ hanter-noz
hag oferenñ-bred gant eskibien ha tadou-abad
e-leiz. Koroll ha kan, hag abadennou all a bep
seurt.

« Eur mor a dud, eur mor a gan,
Setu petra 'vo Bleun-Brug sant Erwan. »

Bezit holl e Landreger, d'an 1, 2 ha 3 a viz Eost.